

Breman 8, ru HOICHE 35000 ROAZON

12 lrs

bremañ

Niv.80 MAE 1988



KLEIZ KREIZ

HA BREIZH



AN DOUR SAOTRET

MAE 1988

KLEIZ KREIZ HA BREIZH

Votadegoù ar 24 a viz Ebrel hag an 8 a viz Mae evit envel prezidant ar Frañs o deus adlakaet e penn an aotrou François Mitterrand gant 54,2 % en eil tro. Un taol kaer eo evitañ a-dra sur hag evit ar strollad a harpe anezhañ, ar P.S., rak ingalet en deus tost da vat an dregantad tizhet gant ar jeneral de Gaulle e 1965. En em c'houlenn a c'heller petra a verko an donañ ar marevezh-se en istor : diskar ar P.C.F. a zo aet dindan 7 % gant 6,76 % eus ar mouezhioù, pe kresk an tu dehou pellañ, ar Front national en deus tizhet 14,38 %, pe taolioù nerzh gouarnamant Bro-C'hall, en deus klasket dedennañ mouezhioù ar vroadelourion c'hall o lazhañ ar Ganaked a zalc'he ar-cherien C'hall war enezenn Ouvea, pe c'hoazh ar c'hempouez politikel nevez a c'hellfe dont diwar un emglev etre ar c'hreiz, ar C.D.S., hag ar P.S.. Gant pouez nevez ha dic'hortoz Jean-Marie Le Pen eo ez eo bet skolet an dud, er Frañs, met muioc'h c'hoazh en Europa hag er bed dre vras. An holl elfennoù avat, a seblant liammet kenetrezo. Digresk nerzh enebñ ar P.C.F. n'eo ket bet diefed moarvat war gresk ar Front National war an tu kontrol ha dres ma teu diaesoc'h d'ar P.S. en em glevet gant ar strollad komunour e klask ur skoazell er c'hreiz, dizoloet a greiz-holl, pa n'hell ket heñañ asantiñ d'un emglev gant faskourien ha gouennelourien Le Pen. N'eo ket anat, avat, e c'hello pe e venno François Mitterrand sevel un emglev nevez gant ar c'hreiz, hag, o tivodañ ar breujoù e klask lakaat ar P.S. da gaout a-nevez ar muiañ niver er parlamant.

En em c'houlenn a reer ha trec'h bras Mitterrand n'eo ket dleet a-benn ar fin da daol gouarnamant CHIRAC e Kaledonia Nevez hag evel m'hell lavare ministr C.D.S. ha breizhat ar Mor, Ambroise GELLEG.

TREC'H MITTERRAND E BREIZH

E Breizh, just a-walc'h, e c'heller klask hag eñ ez eus bet emzalc'hioù disheñvel en doare da votiñ.

Da gentañ e c'heller merzout n'eus bet nemet c'hwec'h maer pe zen dilennet bremañ 2

oc'h asantiñ bezañ paeron da Jean-Marie Le Pen er pemp departamant, ha tri anezho kuzulierien rannvro ar Front National. Sur-mat ez eus bet ur pouez bennak gant al labour graet gant ar c'huzul breizhat a-enep ar faskouriezh hag ar ouennelouriezh en doa gouennet ouzh an holl nac'hañ reiñ dezhañ o sinadur, o skrivañ, ez-personel, da bep hini anezho.

A-hend-all e weler e tizh danvez prezidant an tu kleiz, evit ar wech kentañen holl departamantoù e Breizh, un dregantad uheloc'h eget an dregantad keitat e bro-C'hall : 34,11 % er c'hwec'hkorn, ha 38,2 en Aodoù-an-Hanternoz, 37,6 en Il ha Gwilun, 36,7 el Liger Atlantel, 35,7 e Penn-ar-Bed, 34,6 er Morbihan. Souezhus a-walc'h eo gwelout pemp departamant Breizh a-stroll war goulz lavaret holl ar c'hartennoù o kinnig disoc'h ar votadegoù pa chom muioc'h a zehou an departamantoù a zo war ar vevenn.

Barre, diouzh e du a chom e Breizh, un tamm mat a-us d'an dregantad keitat a dizh e Bro-C'hall (16,5 %) peogwir e ya eus 17,2 % en Aodoù-an-Hanternoz da 20,4% en Il ha Gwilun. Met n'eo ket gwall zisheñvel eus disoc'h rannvroioù kornog Frañs (Normandi lzel, Broioù al Liger ha Breizh) : 20,3 %.

Chirac a zo e Breizh war live e sifr keitat : 19,95 %, pa ya eus 18,9 % en Aodoù-an-Hanternoz da 20,9 % en Il ha Gwilun hag e Penn-ar-Bed. Da geñveriañ gant an dregantad uheloc'hig e rannvroioù ar c'hornog : 21 % keitat gant Breizh e-barzh.

Disoc'hoù Le Pen a zo da vezañ keñveriet gant reoù rannvroioù ar c'hornog dre vras : en dro da 10 % emañ, da lavaret eo un tamm mat dindan e zregantad keitat a zo 14,38 %. Un tammig izeloc'h e vefe zoken pa ne ve departamant ar Morbihan e-lec'h ma tizh memestra 12,98 %.

DISKAR AR PCF HA STROLLADOU BIHAN KREUV A-WALC'H

Diwar-benn ar P.C.F. n'eus ket kalz tra da lavaret : dindan 5 % emañ e pep

BE ZEUS TEIR
BOESTAD SARDIN
HA BIER ER
FRIGO

DISMR

ILS MAGOUILLENT
EN BRETON...



lec'h e Breizh nemet en Aodoù-an-Hanternoz (7,6 %), hag en Il ha Gwilun e tiskan da 2,83 %, da lavaret eo da live trot-skourez "Lutte Ouvrière" (2,59 %) hag hini Juquin (2,14 %). Evel e lec'h all e kendalc'h eta da vont war goazañ.

Un tamm sell war ar strolladoù bihan a laka anat un nebeut diforc'hioù bihan e Breizh : an tri danvez prezidant, Juquin, Waechter evit ar re C'hlas ha Laguiller evit Lutte Ouvrière, a dizh asamblez 9,22 % en Aodoù-an-Hanternoz hag e Penn-ar-Bed, 9,14 % en Il ha Gwilun, 8,93 % e Liger-Atlantel, tra ma ne sachont ganto nemet 7,85 % er Frañs a-bezh, 8,39 % e Broioù al Liger hag 8,22 % en Normandi-lzel. N'eus nemet ar Morbihan hag a zo dindan gant 7,72 % hag a ziskouez ur wech c'hoazh, bezañ tammig disheñvel e Breizh. Kreñvoc'h eo dregantad Juquin e pep lec'h e Breizh, etre 2,8 % ha 2,14 %, nemet er Morbihan (1,74 %) eget e Broioù al Liger (1,91 %) ha Normandi-lzel (1,78 %) hag e Frañs (2,09 %). Marteze eo dleet da c'halvadenn an UDB. Waechter, kannad ar Re C'hlas, a zo ivez a-us d'e zregantad keitat e Breizh etre 3,89 % er Morbihan ha 4,41 % en Il ha Gwilun, peogwir ne dap

nemet 3,77 % er Frañs. Met chom a ra Breizh skoaz ouzh skoazh gant Broioù al Liger (4,05 %) ha Normandi-lzel (4,16 %).

N'eus ket un troc'h bras etre emzalc'h ar Vretoned hag hini tud ar rannvroioù tro-war-dro. Disheñvelderioù a c'heller merzout avat : muioc'h a gleiz eo bet votet e Breizh, rak, en diavaez d'ar Morbihan en deus tapet Mitterrand ouzhpenn e zregantad keitat en holl departamantoù. Gounezet en deus un darnig mouezhioù eus ar c'hreiz en eil tro, hag ar c'hreiz e-unan a zo chomet kreñvoc'h eget e lec'h all, daoust m'eo aet war gill

Techet e vefe ar Vretoned da vennozioù arakour, a ingaldet hag a genskoazell, met a-enep da emzalc'hioù re daer. Doujus e vefent e-keñver ar galloud lezennel, Mitterrand o vezañ an hini a seblant aroueziañ anezhañ ar gwellañ. Peadra da brederiañ evit ar strolladoù politikel breizhat. Da heul divodadur ar Parlamant, ar votadegoù o tont a c'hellfe diskouez ar distro war-du ar c'hreiz, ma kaleta ar P.S. ha ma ne aloub ket heñañ an dachenn-se. Erfin, chom a ra un nerzh enebñ kreñvig a-walc'h gant ar strolladoù bihan, seul vui ma 'z eo bet niverus ivez ar re o deus votet gwenn pe forzh petra en eil tro. T.L.

bremañ 3

ENDRO

SAOTRET AN DOUR



Pep hini a oar mat abao pell 'zo dija n'eo ket mat ken dour Bro Leon da evañ : re a amoniak, a nitrat, a fosfor, a gouev... Gwelloc'h evañ gwinn ruz : al Leoniz n'int ket bet pell o kompren an dra-se, ha n'eo ket diouzh a hiriv!

Me teu ar saotradur diwar implij al ludu kimik e lec'hioù 'zo evel e bro al legumaj (politikerezh ar sac'had ludu dindan pep penn artichaod) e teu ur c'hazh muioc'h avat diwar an dour hanvouez a vez ledet er parkeier pa vez leun ar fos (al ludu-se ne goust ket ker hag al Leoniz 'zo pizh kea !). N'eo ket war an teil e vez produet moc'h ken e-giz ur poent 'zo bet met war glouedennoù betoñs, hep tamm kolo ebet ken dindano eta. Ha 'z eo difraeooc'h e-keñver labour ha marc'hadmatoc'h evit prenañ kolo d'an ampoent, den ne glask gouzout avat ar pezh a goust e gwirionez d'ar gevredigezh.

Hervez ur studiaden diembann hiriv c'hoazh e vefe uheloc'h e Bro Leon niver an dud klañv gant krign-bev al lounezhi met kit da c'houzout... eus pe-

lec'h e teu e gwirionez : ar gwinn pe listri-spluj an Enez Hir ?

Ken uhel eo deuet da vezañ live ar saotradur (ha kreskiñ bemez da ra) ma ranker en em c'houlenñ da vat memes tra ma n'eo ket stummoù a-vremañ al labour zour o unan a zo tonket da vont da get.

Ha pa soñjer er pouez ekonomikel a zo ganto ha drezo ivez en araok pe en adreñv, n'eus ket da chom da straniñ.

BARNEDIGEZH 1992

PE

PAKET DRE AN DAOU DU

Mard eo fall evit an dud (ha bep sadorn war gannadigoù tiez kêr ar vro e c'heller lenn eo difennet groñs ouzh ar vugale hag ar merc'hed dougerez evañ douar an duellenn) e c'heller soñjal n'eo ket gwelloc'h evit al loened.

Ha medisined ar chatal a gred dezho awaloc'h e teu da washaat kleñvedoù 'zo diwar saotradur an dour hep kontañ al lounezhadoù a c'hell pakañ al loened.

Kemer a c'heller skwer ur wiz gozh a gustum evañ 35 litrad dour 80 mg a nitrat enni, pa vez o reiñ da zenañ d'he moc'h bihan : 2800 mg No₃ pa n'e c'hell gouzañv nemet 200 d'ar muiañ hep domaj.

Diaesterioù ekonomikel a zeu da heul pa ranker klask pareañ an droug dre un droug all : al louzeier kimik.

Gwir eo ivez kement-se, kredapl, daoust ma ra diouer an enklaskoù, evit ar plant. Ar pezh a ouzer eo seul vui e implijer louzeier a bep seurt seul vui e ranker implij c'hoazh da c'hounit un dra bennak.

N'eo ket faltazi soñjal en deus talvezet hag e talvez c'hoazh muioc'h mui al labour zour da dachenn difourc evit "trustoù" ar mekanikerezh hag ar c'himiezh. Met un dermen a zo da bep tra...

E BRO LEON



Penaos keñveriañ daou broduktour moc'h hiriv ? Unan o sevel 20 000 pemoc'h bep bloaz a resev ur yalc'had 32 milion a lurioù kozh, an eil gant e 2000 pemoc'h : 10 gwech nebeutoc'h. Lakaet omp bet da grediñ eo ar re a brodue an nebeutañ a oa ar re anti-ekonomik met pe hini a goust ar c'herañ a-benn ar fin ? Ha koust a ra keroc'h rak hiriv, war ar marc'had, eo lezenn ar "re"ha n'eo ket hini "ar re nebeut" ken.

Met ar gwashañ koulskoude a zo dirazomp c'hoazh daoust m'emampo e 1992 dija e meur a geñver. Ar pezh a vo nevez azalek 1992 eo an doareoù a gavo pep bro er CEE da wareziñ he froduktourien.

Lezennoù EUROPA, evit ar pezh a sell ouzh an dour a zo un tamm mat strishoc'h evit ar pezh ez int e Breizh d'an ampoent. 25 mg a nitrat : sed aze al live uhelañ a ranker kavout en ul litrad dour "mat da evañ" -Petra soñjal eus ar 100 mg hag ouzhpenn a gaver koulz lavaret pep lec'h e Bro Leon ?-



N'eo ket an dour hepken ne vo ket mat da evañ, met al legumaj hag ar c'hig eo ne vint ket mat da zebrñ kennebeut.

Evit tennañ gounid eus ar marc'had "ledanaet" e 1992 e vo ret d'ar broduktourien bezañ war evezh ouzh ar reolennoù-se. Kaer o devo o legumaj bezañ marc'hadmatoc'h evit re ar vro e-lec'h ma vint kaset da vezañ gwerzhet, ne vint degemeret nemet ma 'z int hervez ar reolennoù. Anat ne vefent ket hiriv ma vefent er pleustr.

Peizanted liberal Bro Leon a ranko eta deskñ plegañ da reolennoù an natur pa n'en devo ket falvezet ganto doujañ da reolennoù all. Klevet a reer dija hiriv lod anezho o vevliñ al labour zour bev, hag e touesk ar re gentañ o mestr dezho tout : "Alexis, Prince of Brittany".

LEZENN AN HANVOUEZ E BRO HOLLAND

Bro Holland a denn kalz da Vreizh evit ar sevel moc'h, yer... hag evit ar c'hudennoù a sav diwar implij an hanvouez. Eno, ar saotradur e lec'hioù 'zo, e-giz Brabant an Hanternoz, a zo 10 gwech gwashoc'h evit e Breizh : kement ha ma vez miret bremañ da sevel atantoù. E Breizh avat, al liberalisted o deus gouezet ober o mad eus an enkadenn ziwzezh : daou pe drigementet o stal : kenkas ma vefe votet ul lezenn dizale war an hanvouez marteze. ■

J.K.



bremañ 5

bremañ 4

REUZ E RBO-RBI



Dibaoe un nebeut mizioù zo savet bec'h e Radio Breizh lzel etre an implijidi hag ar renevez. Muioch mui ez a RBO, digarezit, RFBO (Radio France Bretagne Ouest) war ar memes hent hag ar radioioù lec'hel all : NRJ, Mandarine, RF1 ha n'ouzon nousep "radio bisous" all c'hoazh. "Ta ves selacoust RBO, n'ouzer mat pelec'h emeur : e Pariz ? e Breizh ? e Marsilha ? Savet hon doa un chadenn radio evit ar vro. Emañ o koll he fersonlezh" ene an implijidi. An holl gelaouennerien, an holl deknisianed hag animatourien zo a sav a-enep politikerezh RFBO, a-enep "Max" Gérard CHARL, rener ar program, deut eus Radio Mayenne ha dreist-holl Eric YUNG, rener ar chadenn, poliser kozh deut eus Pariz. Unan hag unan eo bet lamet an abadennoù gant temoù o tennañ ouzh ar vro : lennegezh, sinema, jazz, bandennoù treset, lezioù-kanañ, anvadurezh, peskerezh... Lakaset zo bet animatourien zo da gompren e oa gwelloc'h dezho mont kuit. Kasat zo bet da gemer o flas animatourien o tont eus Marsilha, Tolosa, Pariz, Lille, h.a... Tud ne ouzont netra diwabenn Breizh ha ne faot ket dezhe gouzout.

DISKROG LABOUR

Mont a ra ken fall an traoù ma oa bet diskroget o labour gant an holl implijidi, war bouez an animatourien "estren" d'an 29 ha 30 a viz Ebril.

Diouzhtu war lerc'h, d'al Lun 2 a viz Mae e oa deut pennoù bras eus Radio France Pariz da welet ar pezh a c'hoarveze e ti ar breur bihan e Kemper. Dibaoe emañ holl abadennoù RBO war an daolenn selao e Pariz. Met e-giz ma lavar an implijidi "An douar hag ar mor, ar rock hag ar gavotenn, ar Brezhoneg hag ar Galleg, plijañ a ra deomp kement-mañ war un dro. Nor selaoerien ivez. Gwir eo, luziet omp, an holl renerien a vez kaset deomp eus lec'h all ne gomprenont netra tout eus ar vro-mañ !"

AR SONDADURIOU

Evit Eric Yung, rener RBO, ne chom ket war sav klemmadeg an implijidi. "N'eus nemet un dra a gont eviton, a lavare en,

niver ar selaoerien 'ni eo. Ra vo prouet din e kollomp poentoù !" Just a-walc'h, hervez ar sondadur diwezhañ, embannet d'an 10 a viz Mae he deus kollet RBO 8,60 % eus he selaoerien en ur ober ur bloaz. Ouzhpenn-se e tiskler selaoerien RBO bezañ dedennet ganti en abeg da sonezezh an hengoun, d'an abadennoù a denn eus ar vro ha d'an abadennoù brezhonek a vez tu da glevet war he gwagennoù.

D'an deiz war-lerc'h embannadenn ar sondadur, e roas "Max", rener ar program e zilez evit kemer ur post e renevez radioioù lec'h, Radio France. N'eo ket bet anvet ar rener nevez c'hoazh, kaoz zo eus un HOEROUX bennak, gwelet 'vo. Unan all a skampas kuit ken buan all : Evelyn ADAM, rouanez ar "bisous", kaset da Radio France Savoie e-giz renevez ar programoù. Chañs vat dezho.

RBO, radio ar vro, ha ne chomo bev nemet ma talc'h gant al lagan-se. Kement-se zo bet laketaet anat gant implijidi Radio Breizh lzel, dre o stourm. Emichañs n'eo ket re zivezhat ha ne vo ket klevet muioch-mui tud o lavaret :

"Deomp-ni 'oa R.B.O. !" ■

Gwenael Caradec.

INSEE

NIVERIDIGEZH 1990

E 1990, a-benn 2 vloaz a-c'hlan eta, e vo niveret poblañs ar Stad C'hall, evel e 1982. Hag evel da neuze ne vo goulnenn ebet e-barzh di-ne vo goulnenn ebet "rannvro", war-benn ar yezhoù "rannvro", e-giz ma laront. Sed a zo bet lavaret din sklaer gant Rener an INSEE e Roazon pa oan bet ouzh e welet d'an 3 a viz Mae.

denn" RBO(rbi) gant 1000 den en ul lodenn eus Breizh hepken (tachennad RBO).

pe hini hon folitikerien, krogomp da soñj da nac'h digemmet bras gant ar minorelezhioù, hag embannomp fraezh ne vo ket tu, ur wech ouzhpenn, da gaout fiziñs e stadegoù diglok an INSEE. ■

M.K.

NAC'H AN NIVERIDIGEZH

Evit pouezañ war o goulnenn e ranko an aozadurioù embann o soñj da nac'h digemmet bras da vrudañ ho nac'hidigezh ma ne vez ket digemmet. Fuloriañ a raio maered parrezioù zo, rak p'o devez arc'hant da gaout a-berzh ar stad eo diouzh niver an dud o chom er barrez e vez roet a-hervez : e 1982 e vennis an Aotrou Philipponeau, eilvaer Roazon, kas an nac'herien dirak al lezioù-barn (promesaou adarre !). Maered all marteze a ziskouezo bezañ a-du ganto.

E 1982 ne oa bet soñjet er gudenn nemet un nebeut mizioù a-raok. En-dro-mañ e tlemp bezañ evedusoc'h. Ha ma ne zeuomp ket a-benn da gaout ar pezh a c'houlennomp, dre hantouriezh ar pennministre nevez

■ Skrivit d'ho maer ha da ganad ho korn-bro evit lavaret dezho e kontit war o skouzell evit ma vo goulnennataet an dud diwar-benn ar yezh a gonizont en niveridigezh da zont, anez da se e nac'hfec'h respont hag e lakfec'h tud all da nac'h.

■ Lakit ho kevredigezh da skrivañ lizhiri heñvel, da gas kemmaadennoù d'ar c'hazetennoù gallek (ha brezhonek !) ha da skrivañ da Rener an INSEE (36, leurenn ar C'houldri 35000 Roazon) er hon yezh, kompren a ra brezhoneg.

■ Skrivit he deus Unvaniezh ar Gellennerien Brezhoneg d'an INSEE a-zivout an afer-se. Unan all a gaso d'ar C'huzul-Rannvro.

RE ZIVEZHAT EVIT HON YEZH ADARRE ?

Gwall zivezhat, emezañ, e teuer da c'houlenn e ve aterset o yezh gant an dud pa 'z eo prest ar paperoù endeo (daou vloaz a-raok !) ha n'haller mui kemm tra. Nemet... goulnennet e vije gant kevredigezhioù an emsav, digant an INSEE evel-just, met dreist-holl digant ar C'hentañ Ministr (a zo Prezidant Kuzul Yezhoù Bro Frañs) da bouezañ war an INSEE. Poent neuze d'an aozadurioù bodet e Kenurzhiezh Sevenadurel Breizh, d'ar re all ivez, hastañ da c'houlenn ma vo enklasket (evit ar wech kentañ !) war ar yezh a gomz an dud er Stad C'hall.

PERAK NIVERIN AR VREZHONERGIEN ?

Unan eus ar stadoù nemeto na daolont ket pled ouzh yezh an dud en Europa eo ar Stad C'hall. E Spagn, e Breizh-Veur, en Italia, e Beljik, en Iwerzhon, n'eo ket heñvel. Pouezus eo dimp bout anavezet evel brezhonegerien gant ar stad, ha gant folitikerien Vreizh evit bezañ difennet gwelloc'h ganto. Pouezus eo dimp gouzout peseurt lec'h hon eus en hon bro ivez. Ouzhpenn-se n'eo ket didalvoud kaout ur sifroù bennak evit galvez, kas war-raok enklaskoù armerzh, h.a. un tamm pelloc'h, ha gwelout penaos kreskiñ pouez hon yezh en-dro dimp. Rak betek diwar-benn ar brezhoneg, ha n'haller ket fiziout e "sonda-

UNAN ALL ANVET EVEL-SE C'HOAZH... UR SAPRE TOLLAD 'ZO DRE ANAN...!



KAN AR BOBL 88

KAN PESEURT POBL?

DALC'HUSTED

Ur perzh mat da nebeutañ en deus Gouel Kan ar Bobl an Oriant :hini an dalc'husted. A vloaz da vloaz, abaoe ur pemzek vloaz bennak, er tro deomp d'ober anaoudegezh gant kanerien ha muzikanerien a vije bet ret deomp mont da redek ar pevar avel evit o gwelet a-hend-all.

Reiñ a ra tro ivez da hini pe hini da bakañ un tamm brud, trawalc'h da lakaat prizañ e dalvoudegezh dreist da harzoù e ganton. Bep vloaz e sav evel-se ur c'haner "kan ha diskan" nevez bennak pe ur c'hoarier telenn dreist d'ar re all.

Dre ar gouelioù a vez aozet e pep rannvro a-raok emvod bras an Oriant e vez atizet meur a gatell ha broudet meur a Yann da zont da deurel o mouezh pe d'ober ur frapad sonerezh. Kalonekaus eo gwelet muioc'h a skolioù o kemer perzh.

HENGOUN

Fellout a ra din komz eus

ar c'han hag ar sonerezh hengounel rak war ar poent-mañ e seblant KAN AR BOBL c'hoari brav e roll.

Trawalc'h e vo reiñ anvioù un nebeut loreidi evit ar bloaz-mañ : Patrick Bardoul eus Kastell-Briant gant an akordañ, Florence Jamain eus an Oriant ha Jakez François eus Naoned gant an delenn, Denez Prigent evit ur werz nevez, Gwennyn ha Viviana Louarn evit ar vugale. Bez e c'hallfed lakaat anvioù Youenn ha Robert Bastard evit ar c'han-ha-diskan ouzhpenn.

Leurenn ar c'han hag ar sonerezh hengounel e Breizh eo KAN AR BOBL a-dra-sur, daoust ma vank, er c'heñver-mañ, rumadoù zo evel ar sonerien daouha-daou hag... ar bagadoù, kement hag ober.

KOZHELEZH

Ganet eo Gouel KAN AR BOBL e-kreiz mare azginivelezh ar sonerezh e Breizh, berzh nevez ar festoù-noz. Breizh yaouank ar bloavezhioù 70 a oa neuze oc'h adkavout he gwizioù. E blas en doa kavet, aezet, KAN


AR BOBL gant al lañs-mañ. Neuze e oa diouzh e amzer.

E 1988 emañ atav ar memes doare war ar gouel, hini mare e c'hanedigezh. Blaz ar c'hoziñ niget evel krouidigezh a-vremañ pe ar pezh a vez loreet da nebeutañ : trawalc'h un diforc'h a remziad yaouankiz evit lakaat da gozh Noe d'an deiz a hiziv.

Un taol dispac'h war dachenn ar sonerezh "vreizhek" a oa bet graet gant Diaouled ar Menez e-tro 1970 pa oant en em lakaat da soniñ ar gavotenn gant harp ar gitar tredan hag ar violon.

Un dispac'h all a zo o tont er c'han-ha-son brezhonek er bloavezhioù 80 : tannañ a reer gounid eus a bep seurt sonerezhioù all ouzhpenn an hini a zo deuet d'ar Vretoned dre hêrezh : blues, rock, reggae ha me'oar-me.

Chomet KAN AR BOBL un dispac'h war-lerc'h. N'eo ket souezhus eta gwelet kanerien pe strolladoù dispar evel ar re Gerloc'h, tad ha mab, Klerwi Rivière, Xanadu pe Korriganed er Lann lakaat dezho ur gloued dindan o fri gant ar juri.



Ar bobl o tañsal war donioù rock brezhonek e Karaz

bremañ 8

AR BOBL ?

Deuet e oa un dornad brav a dud da sal vras Palez ar Gouelioù an Oriant d'ar Sul vintin dre ma oa deuet tad, mamm, breur ha c'hoar da vammañ dirak kement fri-lous e vragoù-berr a oa war al leurenn. Lakait buga- oa war al leurenn hag e vo leun le war al leurenn hag e vo leun ho sal ! Diouzh an endervezh a- vat, set kuit an arvesterien "dre ret", e oa goullor sal.

Hag abalamour ma oa ken rouez an arvesterien an hini eo e ranked lakaat an nebeud tud a oa deuet da zigeriñ ken frank se o yalc'h ? Pa vez graet ar gentoc'h evit mont tre e-pad ked paeañ evit mont tre e-pad ar devezh sul, eus priz ar predoù hag ur banne gleb-gourlañ- chenn bennak e kredfed a-walc'h bezañ e festival sonerezh klase- sell bourc'hizien Kemper e maner Lanniron kentoc'h eget e KAN'AR BOBL'.

HAG HOR YEZH ?

Hor yezh ivez am eus klas- ket en aner, koulz war roll an abadennoù ha war an tikedoù bet roet din. Ha ret e voe d'ur c'hennard o kevezañ war al leurenn mont da glemm ouzh dal- c'her ar mikro evit e lakaat da vevañ teodekoc'h e brezhoneg. Klavet am eus ivez e oa chomet kanerien zo er gêr dre ma oa bet nac'het outo skridoù en o yezh.

Ar brezhoneg, a-benn ar fin, ne dalv da aozerien KAN AR BOBL nemet da ficherezh evit ar sonerezh. N'en deus ket a fran- kiz drezañ e-unan, nag evel berveg da gas ar gouel nag evel harp d'ober enklaskoù sonerezh. Koulskoude na pegen brav e te- gouezh nor yezh gant luskoù ar sonerezh modern "etrevroadel".

Petra ne'm eus ket lava- ret aze : KAN AR BOBL ne ya ket war hentoù ken distrolok. "Après tout, pourquoi pas" a skrive paotr Quest-France "mais qu'est ce que tout cela vient faire au kan ar bobl ?". Ne vije ket bet dislavaret gant juri an Oriant. Padal e oa goullor sal a-dreñv d'o c'heñ d'ar re-mañ.

E Karaz, pemzektez a-raok e oa tud yaouank a gantadoù o tañsal rock war tonioù brezho- nek. N'eo ket eno e oa "Kan ar Bobl" e gwirionez ?

Lukian R. Kergoat.

DESKIÑ PORTUGALEG

Rakkemenn an troour

Unan e-touez yezhoù kom- setañ ar bed eo ar portugaleg -150 milion a bortugalegerien a vefe, hervez ar gelouarn "Viva Vox" ; an darn vrasañ anezho avat (128 milion) a zo o chom e Bro-Vrazil ; en Europa n'eus nemet 10 milion a dud e Bro-Portugal ; kalz Portu- galiz avat o deus ranket mont da estrenvro evit gounit o bu- hez : da Vro-C'hall eo deuet meur a hini eta ; ur gudenn eo evito, eveldomp-ni Bretoned, dere'hel d'o yezh, evel m'hen diskouez ar pennad-mañ, tennet eus "Viva Vox".

Daou zoare kelennadurezh a zo -pe e vez graet e-barzh fram- eurioù normal ar skol pe e-pad eurioù ouzhpenn. En doare ken- tañ e vez kelennet portugaleg d'ar vugale portugalat e-pad ma task o c'henskolidi c'hall dan- veziou all, met an holl a vez sables evit studiañ an danve- zioù diazez evel ar galleg hag ar jedoniez. En eil doare ez eus kentelioù portugalek ouzhp- enn an eurvezhoù boutin d'an holl skolidi : evelse e vez graet pa n'eus ket salioù a- walc'h er skol pe pa'z eus ne- beutoc'h eget pemzek portugalat en ur c'hlas.

Er skolioù sil derez e c'hell ar skolidi portugalat dilenn ar portugaleg evel unan eus an div yezh estren a vez kinniget er skoloù gall. Evit-se eo ret kaout un niver bras a-walc'h a skolidi c'hoant ganto deskiñ portugaleg. Kelen- net e vez portugaleg gant ke- lennerien c'hall dindan beli badagel Ministrerezh Gall an Deskadurezh.

Pa n'eo ket posubl lakaat ar portugaleg e-barzh fram- studioù ur skolañ pe ul lise eo posubl deskiñ anezhañ gant ani- matourien.

E skolioù meur zo e vez kelennet ivez yezh, sevenadur ha lennegezh Bro-Portugal hag ar c'hentañ-se a vez heuliet gant Galloued, Portugaliz pe estrenien all.

(brezhoneg gant Bernez Kadored)



bremañ 9

BEAJ

MYVATN

Hervez ar c'houzieren a zo o micher pleustriñ war vuhez al laboused, da lavarout eo an evnourien, e vefe tolead Myvatn al lec'h ma vez kavet ar miñañ a houidi gouez en Europa. Tri-zek seurt houidi a zeu ingal da neizhiañ tro war dro d'al lenn.


Estreget al laboused a vez dedennet gant douereier peskus al lenn met gant ar stank mar deo an hedadoù c'hwibu war ar ribloù eo ret d'ar besketarier gwiskañ ur roued en-dro d'o fenn. Anat e teu d'an holl ar perak eus anv al lenn.

Hiziv an deiz ez eus 600 a dud o chom en tolead. Er mojennoù danevellet el Landnama, levr an trevadennerezh, e vez alies anv eus o hendadoù. Bevañ a raent gwechall diwar ar sevel loened dreist-holl. Ne ra ket diouer ar pradeier eno evit ober d'ar saout ha d'an deñved peuriñ. Abaoe un nebeud bloavezhioù e vez graet war-dro ar c'hailhar organek ravanellet diouzh strad al lenn. Un tredanva dre wrez an douar a ro fred da dud ar vro ivez. Ret eo c'hoazh degemerout ar maread touristad a dremen dre hanternoz Bro Island e-doug an hañv. (Ouzhpenn 100 000 bep bloaz).

E reter ar vro ez eus ul lenn vras all, Lagarflijot hec'h anv. Danevellet e vez e vefe un euzhvil o vevañ en he strad. Daoust hag eñ e vefe ur c'henderg da Nessy ?

Bevennet eo al lenn-se gant koad brasañ an enezenn, ennañ gwez da welet ar re omp kustum da welet e Breizh. Eno e vez aozet sonadegoù rock bep ar mare evit yaouankizoù ar vro. Un nebeud bloavezhioù zo e veze aozet seurt gouelioù tostoc'h da dolead Myvatn, en ur faout koadek strizh ha don, dezhañ doare un houarn marc'h. Hervez ur vojenn e vefe roud hini marc'h ramzel un doue vi-king. Deut eo al lec'h-se da vezañ ur mirva naturel evel Kornad Myvatn. ■ Paol ar Meur.

(*) N'int ket toullou diskarg gwirion.



TOLEAD MYVATN

lanvadoù mein teuz o tizhout al lennoù pe ar palodoù.

Peadra a zo da vezañ souezhet dre gantreal etre peul-vanoù espar an dislonkadennoù kozh. Lavaret e vije emeur e-kreiz ur gêr rivinet gant ur vombezadeg eus ar zrasutusañ. Gweladennourien 'zo o deus kollet o hent en ur avañturin er milendall-se.

Ur mare a zo bet e oa tu da gouronkañ e dour klouar ur faout bolzet. Siwazh deut eo an douar da vezañ re domm goudegi-hun ur menez tan.

E-harz tergin mar deus warno koc'hennou souffr, e trouz ur chaodouronad pri berv. Arabat lammat dreist ar c'herdin a vir ouzhoc'h da vont re dost diouto, rak anez-se e vo devet ho treid evel ma c'hoarvez alies gant an dud diboil a gred hen ober. Pelloc'h e spurmanter tachennad ruz ur menez tan o tivogediñ. N'eo ket echu gant ar c'hornad da gemmañ.

Ar re a blij dezho studiañ pizh al laboused ne vint ket dipitet o te gouezhout en tolead. Diniver int hag eno ne glaskont ket spontañ an dud dre ober an neuz da zont war o zu evel ma ra evned zo war an aod evit difenn o neizhioù.

E hanternoz Bro Island, nepell diouzh Akureyri, a-nezhi eil kêr ar vro, eni 14 000 a dud o chom, ez eus ur c'hornad n'eus ket par dezhañ en Europa, anezhañ tolead Myvatn, da lavaret eo tolead Lenn ar c'hwibu.

Bet e oan bet o pourmen ennañ d'ur mare ma ne dizhe ket an deñvalijenn ar c'hontreou a c'hoari an dro d'ar penn ahel tostañ. Eno e c'heller bamiñ ouzh endroioù gwallizishevel an eil re diouzh ar re all dre vont war droad.

Nevez stummet eo trowardroioù al lenn peogwir emañ e penn norz an dachenn danveneziek bev a dreuz an enezenn. N'eo ket ul lenn don. Pevare lenn vras ar vro an hini eo koulskoude, dezhi 37 km². Stank ha liesseurt eo ar plant war he glannoù ha war an hanter kant enezennig bennak a-strew warni. Souezhusat tra pa vez gouezet emeur tost tre d'ar boaead ludu ec'hon ma oa bet warnañ an dan-keñ o labour araok bezañ kaset da zastum mein war al loar.

War ribl su al lenn e ver-zer ur bodad ronioù geotek, kleuziek o lein (*). Stummet e vez seurt tosennoù pa vez al

bremañ 10

EUSKADI-BREIZH

STUDI HAG ESKEMM

GANT EUSKARIZ DA GENVER FESTIVAL SINEMA DOUARNENEZ 1988



Redadeg evit ar yezh en Euskadi

E vel m'hon eus dija roet da c'houzout e niverennoù diwezhañ "Bremañ", e vo gouestlet Festival Douarnenez da Vro Euskadi er bloaz-mañ etre an 29 a viz Eost hag ar 4 a viz Gwengolo. Festival Douarnenez n'eo ket hepken ur mare-vez diskouez filmoù dudius hag anaout broioù all, pobloù all, evel ma ra "Connaissance du Monde" da skwer. Ur gwir lec'h kejañ etre ar Vretoned ha tud eus broioù all ez eo. Eno e teu tud a bep seurt : saverien filmoù eus ar pobloù pedet eveljust met ivez arzourien a bep seurt, skrivagnerien, sonerien pe garterien, istorourien, tud e karg en ensavadurioù ofisiel pe en emsaviou.

Evel-se ez eus bet tro da welet ha da gejañ ouzh renerien talunya, rener minister sevenadur Katalonia, pennoù bras emsaviou ar Re Zu e Norz-Amerika pe an Indianed, kejadegoù a zo bet etre renerien bankoù evel Breizh ha Credit Agricole, Bank all. Pividik kenañ eo eta an der ket muzuliañ o efedoù en un doare resis eveljust.

tennañ eus skiant prenet Pobl Euskadi, a zo tost ouzhip war veur a boent hag en un doare ispisial e-keñvar stad ar yezh, ha token darn eus an ekonomiezh.

Ouzhpenn-se e vo savet 2 zevezh-studi all gant Skol An Emsav ar Sadorn 27 hag ar Sul 28 a viz Eost evit an holl re o deus c'hoant anaout gwelloc'h an Emsav e Breizh ha prederiañ an Emsav war an doareoù da gas anezhañ war-raok. Da c'hortoz kaout titouroù resisoc'h e c'heller skrivañ da Skol An Emsav - 8, straed Hoche - 35000 - Roazon. ■

KELEIER GWEZENN

UR CHANS DIBAR

Koulskoude e c'heller souezhin o welet ne zeu ket eno kalz emsaverien, paneve, marteze, evit devezh ar filmoù breizhek, ha ne denner ket moarvat an holl c'houid a vefe tu eus ur seurt degouezh. Hag e gwirionez ez eo ur chas dibar a-walc'h bodañ e-giz-se, dindan nebeut amzer, tud a zo e-touez reoù oberiantañ o broioù.


Neuze ez eo bet divizet gant aozerien ar festival fram-mañ an darempredoù-se en un doare disheñvel : 2 zevezh penn-da-benn, al Lun 29 hag ar Meurzh 30 a viz Eost a vo kenurzhiet dindan stumm ur seurt staj-studi. Tro hor bo eta da gaut kaozeadennoù, gant skozell filmoù berr, diwar-benn buhez kevredigezh Euskadi war bep tachenn : an istor, an ekonomiezh, frammoù ar gevredigezh, an ensavadurioù hag ar stourmoù lies-seurt. Kendivizoù hag eskemmoù a vo eveljust. Ar pal a vo ivez gwelret war be dachennoù e c'hel-lo bezañ kenlabour ha peseurt mad a c'hellomp-ni, Bretoned,

L'abourat mat a ra ar gevredigezh GWEZENN e Bro-Redon. Da gentañ war-dro Unvaniezh Breizh. E miz Meheven e vo aozet ur vanifestadeg e Redon evit gouenn un hent e-touez ar broioù da Redon, pe gentoc'h evit gouenn ma vo paet he skod gant "Bro" ar "Peiduloar" a nac'h ober betek-hen, pa vo paet gant departamantoù Il ha Gwilun ha Liger Atlantel, ha gant "rannvro" Breizh.

Ouzhpenn-se e vo aozet DEVEZH AR VRO gante e Ballon. Met n'eo ket a-walc'h-se. Kaset eo bet war-raok gant tud Gwezenn menoz ur c'hlas divyezhek er c'hentañ derez ha 48 bugel a vefe prest da lakaat o anv... mar bez degemeret gant ar Rektor. Da c'hortoz o deus aozet ur fest-noz da sikour Skol Diwan Naoned.

Evel a weler n'eo ket chom da bakañ kelien a ra izili Gwezenn hag e meur a gêr all eus Breizh e c'hallfed kemer skouer diwarno. ■

bremañ 11



TAOLIOU PLUENN

GANT

gent skolaer gallek a zo o vont da gelenn e Louiziana a-benn miz Gwengolo (O.F. 30.3.88). Nav skolaer eus Diwan a zo o vont da vevañ gopret gant ar stad c'hall (O.F. 31.3.88). Pa ouezer pegen pitilh eo Bro-C'hall gant ar justilh hag ar gevatalded ne c'hallier ket mirout a soñjal e talv 9 skolaer eus Diwan kement hag 20 skolaer gallek : na ne varvont gant an naon e raint gant ur re gorfad lorc'h !

Bouessis, Spezed, ar Gelveneg, Daoulaz, Brignogan, Berc'hed, Kanihuel, Tregastell, Plusulian Tredias, Karaez, Sant-Toz, hag all...

Evit Bousell e oa maered Tregonno, Sant Mudez, Trehoenteng, Baod, Seglian, Pleven, Kerien, Laouargad, Korle, Kergrist-Moelou, Trabrian, Kamlez, h.a....

Evit Waechter e oa maered Goudelin, Plougerne, Landeda, an Intel, Trefendel, Sant Karreug nemetken.

Ne ouezer ket dirak petra estlammiñ gant an daou gelou-se -Dirak brokusted Bro-C'hall o kinnig he sevenadur enkorfet en 20 den stummet ganti, da Louizianaiz isdiorroet, pe dirak he fizhoni o paeañ 9 den diwar ar 37 klas a zo gant Diwan pa n'eus koustet gwenneb ebet dezhi o stummañ ?

Evit Laguiller e oa maered Mantalod, Lanrodeg, Treglanvau, Konkored, Bohal, ha Paoul.

Evit Jean-Marie n'eus bet maer ebet. Gwell a se. (G.S. 3 maer a oa met n'eo ket bet embannet o anvioù er G.O.)

SINATURIOU

r ranell zo ac'hanoz to bet o lenn "Kazetenn Ofisiel ar Republik Gall" da welout piv en doa sinet evit an danvez-presizant.

Evit Jean-Marie n'eus bet maer ebet. Gwell a se. (G.S. 3 maer a oa met n'eo ket bet embannet o anvioù er G.O.)

Evit Barre e oa un toulad mat a vaered : re Blouider, Plougouma, Landevan, Plogastell, Brandorion, Gwitalmeze, Ploneour-lanvern, Gwitreg, Fouenant, h.a....

DIGREDDUS ?

avet eo bet ar CRBC (Centre de Recherches Bretonnes et Celtiques), renet evit doare gant an Ao.Ao. Le Du ha Le Berre, a-enep goulnenn Kreizenn Vrezhonegerien Brest a glaske kaout skritelloù divyezhek e ti nevez ar "Palais des Arts et de la Culture", pe gwir ne blijje d'hon c'helennerien veur (izili bodad-barn ar "C'hapes" brezhonek, mar plij) levraoueg.

Evit Chirac e oa maered Plovan, Uzel, ar Gorzh-Korle, Edern, nemetken, met trawalc'h en doa kavet e lec'h all.

Sed a lenner e niverenn diwezhañ Emzenn, ha ken brav all a-berzh an Aotrou Keravel, an den a c'houlenn ur statud ofisiel evit "Yezhoù ar Frañs", met netra evit ar brezhoneg e kêr Vrest, "gant aon e ve skrivet e peurunvan" emezañ. Difenet brav eo hon yezh, tudou.

Evit Mitterand e oa maered Flourin-Montroulez, Banales, San Jili ar Menez, Sant Sebastian hag un nebeut kuzulierien :

Evit Lajoinie e oa maered Douarnenez, Berrien, Ploumeur-Menez, Skrignag, Tregouez, Plouvagoar, Plijidi, h.a....

Souezhusoc'h avat ar vae-red o deus sinet evit ar "re vihan".

Evit Juquin e oa Louis Chopier, bet maer Sant Malo, ha maered Kamorzh, ar Chapell-

AR ROZENN D'AR BLOTOU

a brav e oa miz Mae... e 1981 ! Soñj hoc'h eus ? Ebat er stradaoù... Fiziañs, stad ar c'hraas... Gortoz ha gwelout. Gwellet hon eus.

7 vloaz war-lerc'h ne e oa mui ar P'S'F e oa kaoz neuze da adstagañ Naoned ouzh Breizh, da reiñ ur statud d'hon yezh. Ha 7 vloaz war-lerc'h n'eus den en "emsav" o kredin komz ken eus sord'hennoù kozh evel an "Tal-benn" ("Araokour" a-raok bour "sevenadurel" pe ar c'ontrol?) eus ar "majorité présidentielle" e oamp holl e-barzh (hep goulnenn hon ali !) : ar re a oa leun o beg gant seurt kaozioù a dav hiziv. Souezhus, keta ?

O ! Hon galvet o doa da vont da votiñ evit Juquin en dro gentañ, ha Fañch Mitr (uns) en eil tro, war zigarez e oa dañjer bras gant Chirac-Le Pen. Ha gant ar P'S'F, n'eus dañjer ebet ? Ha paouezet o doa gant bombez Mururoa ? Ha roet o doa ur statud ofisiel d'hon yezh ? Piv en deus lazhet Eloi Machoro ? skarzhet an Euskariz kentañ ? lakat da darzhañ ar "Rain-bow Warrior" ?

Ha Klevet hoc'h eus an deiz all Fañch Mitr o lavarout e oa bet a-du gant un diskoalun soudardel en Ouvea ? Evit se eo hoc'h eus votet ? N'eo'c'h oc'h c'hwil gant Jean-Marie ? N'eo'c'h on-me ivez gant ar re a lar traoù seurt-se hag o deus gal-loud ouzhpenn !

Ha gallet e vo tennañ un dra bennak eus trec'h ar P'S'F evit mad Breizh ? Mar kred lod, ra zispiegint buan penaos neuze ! Aon zo da gaout n'eo ket gant un emsav toc'h-or e wellao stad hon bro hag hon yezh, pa glasko jakobined an tu-kleiz, ruz-tan, ruz-sklaer pe disliv e vent, mougañ hon mouezh gant gwask o zrec'h.

Diouzh m'o lezim d'ober e teuint a-benn.

Tangi ar Bleiz.



YANN BISMIG

TANGI AR BLEIZ



CAPEZ BREZHONEG 1988

den, diwar an 9 o doa lak- et o anv, a oa deuet da Roazon da dremen lodenn dre skrid ar "C'hapes" brezhoneg e miz Meurzh. Diwar ar 6-se eo 3 a yelo da Bariz da genver al lodenn dre gomz... hag UNAN a vo resevet (3 warlene, 5 er bloavezh a-raok). Pet a vo da vloaz ?

Abaoe marv Leon FLEURIOT ez eus kemm e bodad-barn ar C'Hapes. En e lec'h, e penn ar bod 6 ezel, emañ an Aotrou Jean le DU, kelenner e Skol-Veur Brest. Gantañ emañ e genseurt Yves le Berre, asamblez gant ur c'helenner saozneg eus Pont-n-Abad, an Aotrou Chiquier. Gant an 3-se, hervez an teodoù fall, e vefe 50 % eus izili ar bodad e-barzh ar PJF, pa ne oa ket gant ar strollad politikel-se muioc'h eget 7 % eus mouezhoù bro-Frañs ha 3,5% eus re Vreizh en delennadeg diwezhañ, an 3 ezel all o vevañ Fañch Morvanou Per Denez ha Christian Gwion-varc'h. 2 gelenner diwar 6 a zeu eus Skol Veur Roazon eta, pa 'z eo 5 studier enskrivet diwar 6 a zeu ac'hano.

Amzer o deus bet padred an tu dehoù, kent kimidiñ di- ouzh ar galloud, da envel Chris- tian Gwionvarc'h da gelenner Skol Veur, ha d'e lakaat e Ku- vezh mat evitañ eta, dreist- -personne qualifiée da reiñ e ali diwar-benn un "DEUG" bre- zhoneg en doa kavet didalvoud. War urzh ar Ministr ? Mil ben- nozh dezhañ.



FRANCE

REGIONS

SKOAZELLIT

Krog eo ar Stad C'hall da dennañ arc'hant diwar gont Kristian Georgeault a oa bet kondaonet warlene da baeañ 4 milion hanter a lurioù kozh evit panelloù mastaret e Bro-Foujera, goude m'en doa diskleriet e oa digablus, ha n'en doa graet nemet prestañ e garr, a oa bet anavezet gant ar bolis, da dud all.

Ezhomm zo arc'hant eta e- vit ma ne baeef gwenneb ebet ar stourmer-se, 300 lur ar miz a vez tennet digantañ. 30 den o paeañ 10 lur bep miz a vefe a- walc'h neuze. Degemeret e vez an arc'hant-skoazell gant ar gevredigezh BREZHONEG OFISTIEL. (50,stread Hamon, 35000 Roazon) savet evit-se gant SAB. Skrivit buan da reiñ ho skodenn viziek.

(* Ouzhpenn 10 lur skoaz- zell/30 den a vo ezhomm ! Setu ma c'houlenner 18 000 lur di- gant Herve ar Beg, evit mizou- barnerezh !!!

5300 lur a zigoll eo o deus Herve Barzhig, Gwenola Blanchard ha Serge Coglín da baeañ kenetrezo evit panelloù livet e Kastellvourc'h e miz Gouere 1987. Ouzhpenn-se o deus 5000 a dell-kastiz da baeañ pep hini. Bezit brokus eta.

Tangi ar Bleiz.

M'HO PEUS C'HOANT BEZAN Kelenner(ez) pe Animatour(ez) EN OALED e-pad ar vakañsoù, n'ho peus ken skrivañ pe bellgomz deomp Ezhomm ez eus tud atav !



D'ar 16 a viz Ebrel e Schlettstadt, Cîtestat e galleg bras, e oa bet dalc'het Bodad-Reizhadur ar Skour Elzas Unvaniezh Rannvroelourien Frañs. Diwar an 250 ezel e oa deuet 50, galvet gant diazezer ar gevredigezh, Charles Gold- stein, en doa dija krouet ar c'hvevredigezhioù HEIMETSROCH UN TRADITION, JUNG ELSASS hag ar gelouenn D'HEIMET (2500 skwerenn).

E-touez an dud-se e oa ur c'hannad CDS, daou guzulier kan- ton (PS ha CDS). Ur c'huzul-Ren 9 den zo bet anvet, en o zouez Andrée Buchmann (ar Re C'hlas), ha 3 dileuriad zo bet anvet e- vit 7 kanton.

Klask a ra ar gevredigezh skoulmañ darempredoù gant "rann- vroioù" all. (Betek-hen n'ana- vez nemet ar gazetennig "Ar Gwir eneb ar bed" !) evit kreñ- vaat he levezon.

Fellout a ra dezhi ivez diazezañ "rannvroioù" gwirion (Naoned e Breizh !) ha pouezañ war an dilennidi evit tizhout he falioù. Goulenn a ra e vefe savet, e-lec'h ar "Senat" gall, ur c'huzul eus ar Rannvroioù, evel en Alamagn hag er Stadoù- Unanet.

Da vont e darempred gant -skrivañ da : Charles Goldstein 9, Gwynemerstrasse 67600 SCHLETT- STADT.





O BREIZH VA BRO

EMBANNET GANT BRUD NEVEZ

Quelle école pour la Bretagne ?
Peseurt Skol evit Breizh ?



DIWAN Europe Education
Centre Mondial pour l'Education Bilingue
Institut Culturel de Bretagne

A ktou ar c'hendiviz war an divyezhegezh en Europa a oa bet dalc'het e Landerne azalek an 30 a viz Here betek an 3 a viz Du 1985 a zo deut er-maez nevez zo. Gant ar skolioù DIWAN e oa bet aozet ar c'hendiviz ; gante ivez, sikouret gant Skol Uhel ar Vro, eo bet embannet e aktou e stumm ul levr kinniget brav. A-bep seurt skridoù 'vo kavet e-barzh. Da gentañ testenn an holl brezegentoù bet distaget e-pad ar c'hendiviz. Ur sell war vroioù all e-giz Katalonia, Kembre, Flandrez, Euskadi... a vo interresant kenveriañ gant Breizh. Skridoù all war an divyezhegezh -talvoudegezh ar yezhoù gwas-ket, dañjer ar saozneg, an deskadurezh e div yezh, h.a... savet gant mailhed evel J.J. KRESS psikiatr ; Gilbert DALGALIAN, pedagogour ; Yvo PEETERS, Karmen GARMENDIA. Kavet 'vo ouzhpenn el levr, rentoù-kont ar bodadoù labour hag o c'hinnigoù hag a bep seurt titouroù war istor ar stourm evit ar Brezhonég, h.a...

Ul levr klok eta, ret d'an holl re dedennet gant ar yezhoù gwasket hag o c'helenn, aes da gompren ha da implij. Kavet e vo da bremañ en tier-levrioù mat pe en ur skrivañ da Ziwan, 29214 - TREGLOU. ■

Gw. C.

Un darvoud digustum e vez atav gwelet ur romant nevez o tont e-maez e Brezhoneg siwazh, ha ret eo an zav n'eo ket yac'h tre hon lennegezh er c'heñver se da nebeutañ. Ne c'hell ket bezañ re figus al lennerien war ar varc'hadourezh forzh penaos.

Gant ar spered-mañ am eus digoret romant Mikael Madeg hag an zav a ran on bet souezhet, ha me paket gant an istor eus ar penn kentañ betek ar fin.

Emañ Jampi en un tren a gas anezhañ en dro da Vro Leon, ur bistolenn a zo gantañ ha mennet eo start d'ober e stal d'ur mignon kozh dezhañ a zo kaoz eo bet toullbac'het sañset. Steuñvenn ur gwir "thriller" a zo aze ha dont a ra a-benn an aozer da dennañ e vad eus rambreadennoù an haroz evit reiñ lusk d'un istor en dije gallet bezañ un tamm goular a-hend-all. Dic'hortoz eo ar fin ha gwella a se rak souezhiñ a zo perzh gwellañ romantour ar seurt-se.

Spered ar bloavezhioù 70 a zo taolennet mat el levr ha muioc'h en e vleud e vez ar skrivagner o tanevelliñ rambreadennoù Jampi er c'houlz-se. Gwirheñvel-tre e teu da vezañ an amzer dremenet ha diaesoc'h d'ar skrivagner lakaat ac'hanomp da greidiñ er pezh a zo an amzer vremañ er romant. Un digempouez a zo forzh penaos etre un emzalc'h displeget dre ar munud er penn kentañ hag ur fin lec'hma ne reer nemet damzivinout abegoù an haroz.


Ne ziskargin ket mel gant al loa-bod 'ta met ur romant plijus da lenn eo, zoken ma ne chomo ket e-touez penoberennoù ar Brezhoneg. Un tamm re laosk eo yezh ar skrivagner, ar santiment a vez e teu gantañ hep na vefe adlakaet ar skrid war ar stern evit peurgempenn anezhañ. N'eo ket ur rebech da vezañ graet ouzh Mikael Madeg e unan avat, sin hon amzer e vefe kentoc'h, nebut a dud a gemer ar boan da vont betek ar vistradenn ziwzeñ. Ne vern ezhomm bras a zo eus levrioù eus ar seurt-mañ forzh penaos. Chañs vat d'an aozer 'ta evit kenderc'hel gant e erv ha pourchas deomp meur a oberenn eus ar stumm-mañ. ■

Yann Pennhalég.

Lennit al liamm
Skrivañ da : AL LIAMM
16, straed des Fours à Chaux
35400 - SAINT MALO -
Koumanant bloaz 120 lur (studierien, tud dilabour :100 lur)

LIGER ATLANTEL HA BREIZH UL LEVR A-BOUEZ

GANT PER YVES RHEUN



SKOL VREIZH

E ma SKOL VREIZH o paouez embann "BRETAGNE GRAND OUEST", ul levr talvoudus kenañ savet gant Per-Yves REUN diwar-benn kudenn Liger-Atlantel hag harzoù rannvro Breizh hag ar rannvroioù all dre vras e Bro-C'hall.

Anavezet mat eo Per Yves Reun evit e labour gant AR FALZ ha SKOL VREIZH hag en un doare ispisial evit dastumadennoù levrioù istor ha douaroniezh Breizh. Bet eo bet ivez e penn ar stourmoù a zo bet kaset war-raok abaoe bloavezhioù evit adstagañ Liger-Atlantel ouzh departamantoù all Breizh. E-pad meur ar c'h'OUAB (Kuzul evit Unvanidigezh Breizh). An emsaver, met dreist-holl ar c'heñver lenner douaroniezh e Skol Veur an Naoned, eo en deus savet al levr nevez-mañ. Diazezet eo war fedoù ha sifroù resis.

Da gentañ e tiskouez en-dro penaos ez eo Liger-Atlantel ebet, a-dreuz an unnek kantved yaoul annezidi o-unan, evel ma oa bet lakaet o-unan, evel enklask FR3 e miz Genver 1986. ez eo a orin Breizh tri-c'hard ar boblañs. An dilennidi o-unan -kuzulierien an departamant pe reoù ar c'h'erioù bras- An Naoned, Sant Nazer, Sant Herblen, Rezhieg, Orvez, o deus votet a-dug gant ar c'henstagañ ouzh rannvro Breizh. Met, evit abasoù ekonomikel eo peurvuiañ e chome an traoù e-giz m'ema-

BROIOU-AL-LIGER :
UR SKOILH DA ZIORREADUR
BRO AN NAONED

Mont a reont da heul lobby ar gambr a genverzh hag ar galloud ekonomikel a fellfe dezhañ ober eus an Naoned kərbenn rannvro vras ar C'hornog. Met ur c'hwitadenn eo, evel ma vez lakaet anat gant Per-Yves REUN: enket eo hiziv an Naoned e rannvro Broioù al Liger, hep eue hag hep unaniez ekonomikel zoken. Meur a abeg a c'heller merzhout : troet war-du ar mor, n'hell ket Liger-Atlantel kontañ war departamantoù all ar rannvro evit e skoazellañ. Er c'hontrol, ma vefe stag ouzh Breizh e vefe un nerzh kalz brasoc'h evit difenn raktresoù boutin d'an holl Vretoned. A-hend-all ez eo troet Broioù al Liger a-hed un ahel an Naoned-Pariz, ha Pariz eo a sach an tamm ganti peogwir ez eo kalz brasoc'h he fouez : ar postadurioù graet gant an Naoned er Mans pe e Angers a zegas kalz muioc'h a c'hounid ekonomikel da Bariz eget d'an Naoned. Postadurioù graet e kornog Breizh, avat, a servij da ziorren an Naoned ha Roazon. Erfin, Breizh a zo unan eus ar rannvroioù anavezet ar gwellañ en Europa. A-drugarez d'he fersonelezh ez eo buhezek kenañ hag interest Liger-Atlantel eo bezañ e-barzh un hollad ken brudet.



An Naoned, en ur Vreizh adunvanet, ne vefe ket, evit keloù-se, troc'het eus ar rannvroioù all. Eskemmoù, englevioù etre rannvroioù a c'heller sevel. Marteze e c'hellfe bezañ staget departamantoù all (Vendée, Mayenne...), met n'eus ket interest da sevel ur rannvro vras e-lec'h na vefe beuzet personelezh Breizh a ro dezhi he nerzh. Hep kontañ e c'hellfe neuze sevel kornog ar vro anep d'ur seurt raktres ma ne gavfe ket e gont anañ.

Breizh pemp departamant a vefe unan eus pouezusañ rannvroioù Europa, daoust ma n'eo ket ar galloud ekonomikel a zo da lakaat da gentañ, met c'hoant an dud da vezañ asamblez.

Ul levr da vezañ lennet gant an holl "BRETAGNE ET GRAND OUEST" - Pierre Yves le Rhun - Skol Vreizh - 6, straed Hir - 29210 Montroulez - 55 Lur. ■

T.L.



STAJOU WAR AN URZHATAEREZH
35000 Roazon - Da gaout titouroù skrivit da : OSCR X2000 Pôle Central - 6 bali ar re Unanet - 35043 Roazon Cedex - peil : 99-35.11.11.

BEAJ-STUDI DIVYEZHGEZH

E BRO GEMBRE

FILMOU

PRIZ HENGOUN AR GELTED

EVIT J.L. LE TACON

"AN ABAD PER BOURDELES, EMSAVER"

A et eo priz "Hengoun ar Gelted" gant ar film video brezhonek-gallek "An Abad Per Bourdeles, emsaver". Savet eo bet gant Jean Louis an Takon, an hini en deus savet "Cochon qui s'en dédit" ha "Brisures d'Aber" gant skoazell Gaby Kerdoncuff ha gant gant Video 22 hag Ex-Nihilo. Ar film, anat deoc'h, a zo diwar-benn Per Bourdeles.

Takon en deus implijet skeudennoù kozh ha nevez kemmesket gantañ. Al lanv, arouez un den en deus kaset war-raok e labour tamm ha tamm. An den a-hiziv ivez : Per Bourdeles en tu all d'ur prenestre e ti ar re gozh e Gouareg...

Gwellet e vez skeudennoù kozh ivez a oa bet graet gant Takon diwar-benn an abad Bourdeles evit ar film "Brisures d'Aber". Ur pennad-kaoz e Brezhoneg gant Bourdeles a lar e vevnozhioù diwar-benn an Den, Breizh hag ar Bed, lakaat tud Vreizh da gemer e karg o amzer dazont, adsevel buhez sokial hag ekonomikel ar vro ; ar pezh en deus degaset dezhañ treñ e Brezhoneg levr Dantes : Divina Comedia.

Implijet zo bet kalz skeudennoù filmoù 9,5 m a oa bet graet gant an Ao. Bourdeles e-unan labour an dud war ar maez, ar vugale o c'hoari, stourm ar beizant evit ma vije al lezenn evit al labour douar, a oa bet kaset war-raok gant Alexis Gourvennec ha bet stummet gant P. Bourdeles.

Daniel ar Gevel.

Ur veaj studi a oa bet aozet gant rann an darempredoù etrekeltiek e SUAV evit sellet ouzh plas ar yezh e Bro Gembre an deiz hiziv, da vare Svet Gouel ar Filmoù hag ar Pellwel ar Broioù Keltiek.

Un daouzek den bennak o deus treuzet ar vro-se o kemer perzh er pezh a oa bet kinniget gant Kuzul Kontelezh Gwynedd e Gwalarn Bro Gembre... Caernarfon a zo kerbenn ar rannvro-se.

Pal ar veaj a oa anavezout kevredigezhioù, embregerezhioù hag ensavadurioù o labourat evit ar c'hembraeg.

CANOLFAN IAITH NANT GWRTHEYRN

Evit ma vefe kaset war-raok implij ar C'hembraeg gant an dud e oa ret sevel ur greizenn stummadur "daou-lamm" evit deskiñ Kembraeg. Adsavet eo bet neuze kêriadenn Nant Gwrtheyrn, war an aod, e kreisteiz Caernarfon.

Nant Gwrtheyrn, a oa gwechall gozh, ur geriadenn a vicherourien a labourer er menegioù sklent. Hiziv e vez implijet penn da benn gant stagioù kembraek. Digoret e vez a-hed ar bloaz, ar greizenn a ginnig stagioù, prezegennoù, hag all diwar-benn ar c'hembraeg.

Gant skoazell yalc'hadou ar stad, ar rannvroioù hag an embregerezhioù ez a en-dro Nant Gwrtheyrn. Unan eus binvioù pouezusañ eo evit ma vefe implijet en dro ar C'hembraeg ar vro.

KUZUL KONTELEZH GWYNEDD

Souezhus eo gwelet ti Kuzul Kontelezh Gwynedd : o fal a zo implijet ar C'hembraeg : e pep lec'h, kement testenn a vez embannet a zo Kembraeg-Saozneg. Ret eo d'an holl implijidi gouzout Kembraeg ha divizoù an dilennidi er c'huzul hag en emvodoù a zo e

Kembraeg. Troet e vez e saozneg gant ur jubenour evit an hini pe an dornadig tud n'ouzont ket Kembraeg. An dra-se a zo anat evit an holl.

KELENN

Evit ma kreske implij ar C'hembraeg ez eus bet savet kreizennoù evit deskiñ Kembraeg d'ar vugale-estrafjour : Saozon, Sinaiz hag all...

An doareoù pedagogel a zo evedus : ar vugale a zeske Kembraeg en ur ober 3 miz. An dra-se a zo ul lodenn eus ur politikerezh war an deskadurezh a gaver en dro en holl liveoù kelenn : lañ derez, eil derez ha skolioù meur gant ar C'hembraeg nemetken, zoken er skolioù normal e-giz e hini Bangor.

E-pad 3 devezh, tud Vreizh o deus gallet ober o soñj war al labour a vez graet evit kas war-raok implij ar C'hembraeg e Bro Gwynedd hag ar startijenn a zo gant ar velestradurezh, ar c'hevredigezhioù h.a...

Jakez an Touze.

Danvez preder 'ta evit ar Vretoned aet da weladenniñ bro Gembre.

AN DUCHENN HUD BECHEREL



KAFEDI-TI KRAMPOUEZH
abadennou-noz
A-BEP SEURT

Etre ROAZHON ha DINAN (ul lec'h
plijus, degemer e brezhoneg, da 25
min eus Roazhon !!!)

KENDALC'H KELTIEK



Dilennet eo bet ur burev nevez e-kerz emvod divezhañ ar C'hendalc'h dalc'h et Lesneven d'an 13 a viz Meurzh : Riwanon KERVILLA a zo anvet da brezidantez, Loik CHAPEL : sekretour, Stefan MOAL eil sekretour, ha Yann DESBORDES : teñsorierezh.

Divizet eo bet ober ar C'hendalc'h e LESNEVEN. Kemeret eo bet an diviz war an abegoù-mañ :

-anavezotoc'h e vo gant ar boblañs ar c'hendalc'h ma vez dalc'h et en ur vro, lec'h ma vez nebeut a draoù all. Ral a ouelioù a zo ha nebeutoc'h a douristed.

Loik Chapel.

DEVEZH MARC'HARID GOURLAOUEN

5 a viz Mezheven 1988

DOUARNENEZ

Ur blakenn a vo lakaet war bez Marc'harid Gourlaouen da 11 eur d'ar Sul 5 a viz Mezheven. Da heul al lid e vo servijet ur pred en ostaleri "Les Arcades" straed Commandant teiz hanter. 135 lur e kousto ar pred. Goullenn a reomp digant pep hini lakaat e anv a-benn an 30 a viz Mae gant 60 lur arrez

dre zen.

Laouen e vefemp o klevet kanaouennoù, barzhonegoù, hag all, savet en enor da Marc'harid Gourlaouen ha Skol Ober e-kerz ar pred.

Evit kaout diskleriadurioù skrivañ da : SKOL OBER - Gwarem Leurven - 22310 - Plufur

"BREIZH UNVAN"

Tri seurt goloioù-lizher embannet gant "Kuzul Bro-Breizh evit Breizh Unvan" a ginnigomp deoc'h evit kas ho lizhiri.

-Ar re vihan (114x162) 0,25 lur
-Ar re grenn (110x220) 0,30 lur
-Ar re vras (162x220) 0,40 lur

+ 16 % ouzhpenn evit ar mizoù-kas. Ar gounid a dalvezo da sikour oberiantizoù evit Unvaniezh Breizh, evit ma c'hallio adkavout Bro-Naoned puerrest Breizh, dispartiet m'emañ a-baoe lezenn 1972.

Goullennit titouroù gant "CUAB-Emigration" - 106, chemin de la Côte du Moulin - 78620 L'Etang-la-Ville. ■

SERVIEDENNOU TAOL PAPER

Signañ a ra an O.B.E. serviedennou-taol paper brezhonek. An oberaterezh-se a zo dalc'h et gant KENSAB (kenwerzh e servij ar brezhoneg), hag a zo ur strolladig e-harz an "Organisation des Bretons Emigrés".

Ar servidennou-se a zo enno un tregont bennak a dresadennoù arzel-tre, titlet e brezhoneg hag istitlet e galleg, saozneg hag alamaneg.

Dre ma n'eo ket skignet ar serviedennou er-maez eus departamant "Pen-ar-Bed" hag "Aod-an-Hanternoz", e c'hell ar c'hevredigezhioù breizhek dennet ganto (izili eus an OBE pe get) kavout anezho a-druga pe da stokoù an O.B.E. :

-ar pakad 200 serviedenn = 50 lur, ar c'harthoñs 3000 serviedenn = 660 lur, daou gartoñs 6000 serviedenn = 1100 lur. Bez e c'hellit goullenn anezho digant : Erig Planezza ar Pach - teñzorier an OBE - 106 chemin de la Côte du Moulin 78620 L'Etang-la-Ville - Pellg. 1-3958.45.86.

Mizoù-kas evit ar pakadoù kaset dre bost : 10,50 F. dre bakad 200 serviedenn.

EIL DEREZ DIWAN

SKOLAJ

E mis Gwengolo a zeu e vo digoret ur skolaj gant DIWAN. E Brest e vo staliet ar skol. Gant ar fvet klas e vo kroget ar bloaz-mañ.

Abalamour da se emañ DIWAN o klask kelennerien evit ar bloavezh skol a zo o tont (yezh ha skiantoù an den, matematik ha skiantoù naturel, saozneg).

Klask a ra ivez un animatour a vo e roll :

- kennlabourat gant ar skipailh kelennerien,
-ober war-dro ar vugale e-dia-vaez o marevezh kentelioù,
-kelenn unan eus an danvezioù.

TILT A RAN... TILT A REZ... TILT A RA...



Implijet e vo an animatour-mañ war ar memes diazezoù hag ar gelennerien koulz e-keñver stadud hag e-keñver gopr.

Kement-hini a ve dedennet gant ar post animatour-mañ a zo pedet da skrivañ da sekretouriezh Eil Derez Diwan 8 straed Hoche e Roazon (35000).

Ar goulnenn post a ranko bezañ ennañ :

a-ur c'hCurriculum vitae displeget warnañ : anv, chomlec'h, oad, studioù hag all..., diplomaù ha barreezh war an animaterezh, diplomaù ha barreezh war ar Brezhoneg, skiant micher, b-ur lizher evit displegañ pe- rak en em ginniger.

Galvet e vo diwezhatoc'h ar re en em ginnigo evit tremen dirak ur juri dibab.

Lukian Kergoat Rener Pedagogel Eil Derez Diwan



STAJOU

Goude merenn e vo lakaet hor mignoned eus ar broioù all da zisoliñ Breizh ar pezh a vo un doare evidomp ivez da ober gwelloc'h anaoudegezh ganto.

Pourmennoù bras a zo war ar roll (Brezh Eusa, Park an Arvorig, Gouel an Oriant) ha tro-dro da d/Treglonou e vo tu deomp gweladenniñ bro an Aberrion en ur ober sport (marc'hegañ, bageal, mont war ganoe...)

Abadennoù ha beilhadegoù a vo evel-just diouz an noz !

PEGOUZ ? 1 - 10 A VIZ EOST 88

PENAOZ ? Degemeret e vo ar berzhidi etre Se ha 7e da noz d'ar c'hentañ a viz Eost hag echuñ a raio ar staj d'an 10 a viz Eost goude an dijuni.

PEGEMENT ? Priz ar c'hamp a zo 600 lur en holl. Ul lodenn eus o frejoù-hent a c'hello ivez marvat bezañ paeet d'ar re yaouank gant ma tikouezant o bi-lheji-beaj.


DIWALLIT ! N'eus nemet 50 plas. M'ho peus o'hoant lakaat hoc'h anv, kasit deomp ho fichenn er skrivañ, an abretañ ar gwellañ.

AN OALED- KREIZENN SEVENADUREL VREZHONK 29214 TREGLOU 98-04.07.04.

APEEB REDON

Goude un enklast er skolioù-Stad e Redon, goude ur voadeg e-lec'h o deus roet da c'houzout tud ar vugale desket er c'hlasoù diyezhek e Roazon hag e Rostren o skiant-prenet da re Redon, ur bodad tud a-du gant kelennadurezh ar brezhoneg er skol kentañ derez a zo bet savet. Goulnenn et deus digant Servijou an Akademiezh hag ar Rektordi krouidigezh ur C.P.-C.E.I (11vet-10vet klas) diyezhek e Redon (19 sinadur) hag ur mestr-bale hag a raio kentelioù e brezhoneg e skolioù Redon (39 sinadur).

An A.P.E.E.B. hag ar bodad-tud-se a zo o c'hortoz ar respont dereat d'o goulnadegoù, d'o mennadoù, evit digoradur ar skolioù e mis Gwengolo 1988.



N'eo ket Ivon Krog ("Eost-eg Kerineg"), oberour "Ur sa- c'had marvat'hoù" a vije bet o klask ur vedalenn e mis Meurzh d'wezhañ, e Breizh Breizh : e 1909 en doa skrivet ur pezh- c'hoari flemm anvet "Kleñved ar medalenn" ha war a hañval n'eo ket gantañ e oa taget hon c'hoaper droc'h.

Ar re a soñje e oa steu- siet ar c'hleñved-se avat, da reiñ e lec'h da re all dañjeru- sooc'h, evel ar SIDA, a fuzie eta. Gwir eo n'eo ket da oad ar vedalennid e taper anezhañ kem.

A-herd-all e oa deredet bermit tud d'an abadenn : bou- ed hag evaj evit mamm a oa, ha tu da gargañ bouelloù diwar- goust an embann brezhonell. Cham- pagn d'an holl !

Loeiz Mahe (Roazon)

En diavaez eus ar perma- dioù o reiñ ar c'haleier mallu- nañ, e vije ret da skridaou- rion ar gelaouenn prientiñ pel- looc'h en a-raok o labour evit ma teuint evelkent d'ober gant gwelloc'h brezhoneg !...

Neb en deus memmoziou en e benn pe deus anv evit ur skrid betek da sevel, a c'hall, mar fell dezhañ, lakaat bra- sooc'h aked hag amser hiroc'h da skrivañ reiñ. Arabat klask em- bann diouzh, hogen labourat gant evezh, lenn hag adlen- n, goulnenn ali dreist pep tra, ha gortoz, an eil pe an drede nive- renn da zont kent kas e skrid da vabremañ.

Arabat d'ar remziad-mañ krediñ e skridont evito hepken. Nienn ober a reont evit ar re gohoc'h ivez hag emchañs evit ar yaouankioù o sevel, ma tle o yezh bout ur skouer evito.

Par Even (Gwengamp) Trugarez da b'Even evit e a- liou. Arabat d'hon c'henskrive- rien gortoz e vefe diamzeriet o fennadoù memestra...

C'HOARI

Grid for a crossword puzzle with letters filled in: 1 F O R C H I N D, 2 O R H A B A S K, 3 R I E D I Z, 4 E N O L T I E S, 5 S C H A I T, 6 T O K O A L A, 7 O S P I T A L D, 8 U T D Z K, 9 I M A M L A, 10 A Z E A V U E K

TEM : AN NATUR Ar wech-mañ hon eus diba- bet un tem evit ar gerioù kroaz : an natur n'eo. Se- tu ma tenno lod brasañ ar gerioù zo da gavout d'an natur.

GERIOU-KROAZ MIZ MAE 1988

Grid for a crossword puzzle with numbers 1-10 indicating starting positions.

- A-LED 1- Doue evit ar Gelted - Dour - 2- Gallout a ra tarzhañ - Lavar - 3- Aneval speredek sañset-Legumaj - 4- Kala hañv - 5- Tenval - Stêr Kernev - 6- Straed - 7- Ben pe loen - Priziet gant ar Saizon - 8- Maen amliv - 9- Labous - Stêr Okitania - 10- Ali esket - Frouezh

- A-SERZH I -Lakaat - Gwent - II -Liamm - Prizet gant an Iwerzhon- ned - Derou ar vuhez - III -Gwez - Menez-tan - IV -Tu - Kensonnoù - V -Klask vidiou - Loch evit lod, palez evit lod all - VI -Tizh ar stêr - Fa vez noz - VII -Ment - Kas d'an traoù - Douar - VIII -Imobil - Derv - IX -Feneant - D'ober chouchenn

BREMAN NIVERENN 80

MIZ MAE 1988

TAOLENN

Table listing rankings for Breizh, RBO/RBL, Niveridigezh 1990, Kan ar Bobl 1988, Deskiñ Portugaleg, Myvatn, Euskadi-Breizh, Taolioù Pluenn, France Régions, Levrioù, Filmoù, Beaj Studi, Kendalc'h Keltiek, Kemennadennoù, Lizhiri, C'hoari, Mesk-Divesk.

Pennadoù gant J.K., T.L., Gwenael Caradec, M.K., Lukian R.Kergoat, Paol ar Meur, Tangi ar Bleiz, Yann Pennhaleg, Daniel ar Gevel Jakez ar Touze, Loik Chapel ha Garan ar Meur, Bernez Kadored.

Maketenn gant Lena Louarn Jil Killever, Nolwenn Louarn, Mikael Baudu.

Skoazell gant Noela Olier

Tresadennoù gant Malo Louarn - Mikael Baudu

Fotioù gant Louis Blonce Lena Louarn, Bonheur, OF.


Rener ar gazetenn M.BAUDU

Moulet e TI O.S.C.R. e Roazon- 99.30.16.49.

KOUMANANT BLOAZ 120 lur estren-vro : 150 lur, ha komanant-skoazell adalek 150 lur.

BREMAN - 8, STRAED HOCHÉ- 35000 ROAZON 99.38.75.83.

MESK- DIVESK



Pell emañ bremañ ar goañv. Serret ar "Restorant du coeur", ar "Bankoù boued", diskuizhañ a ra ar Secours Populaire pe ar Secours Catholique. Ar re baour ha dibourvez n'o devez ket o naon pa vez an heol o tommañ.

Ar pezh a blij ar muiañ en emsavioù-se, eo gwelet pennoù renerien ar c'hevredigezhioù er c'helaouennoù a-bep eil. Gwelloc'h hag aesoc'h evit gwechall : bremañ e c'heller reiñ an aluzenn hag hen reiñ da c'houzout tro-dro, hep bezañ pinvidik. ■

A-benn dibenn ar bloaz e krogo ur savadur nevez er c'h-kroverty, e pleg-mor ar Morbihan : 500 devezh-arat a vo implijet evit sevel un ostaleri bras (180 ranndi), ur greizenn morvezegerezh (renet gant L.Bobet), tachennoù golf ha tennis, ur skol bageal-drelien.

Laouen Marcellin : 200 milion a lurioù postet ; 150 post labour krouet. Evit pinvidien servijet gant Bretoned sklavel. ■

N'em boa ket klevet anv biskoazh eus konkour barzhonegoù ar Baol, met, a-hervez, e vefe brudet. Er bloaz-mañ eo bet c'hoarvezet un drogamm vrav gant an aozerien. Da vare ar c'henskrivadeg o deus resevet un dornad barzhonegoù anvet "Forfaitures d'Amour", sinet Dominique POMEL, eus an Oriant. Awenet e seblante ar skrivagner, hag e oa kinniget dezhañ ar priz kentañ, rik ha brav. Ar pezh a nac'has en ur zispiegañ ne oa en e skrid nemet oberennoù RILKE, REVERDY, HOLAN ha CADOU. Pesk-Ebrel ! Gwarded ar varzhouriezh divasklet ! ■

ROBINSON e-touez ar gouelini". War an enezenn Geo-teg en deus divizet an Ao. SAEZ, ur C.R.S. eus AGEN, bevañ e-pad ur miz. Degaset en deus gantañ un deltenn, ur gontell, ur geriadur ha dek hinggenn. Ne zebr nemet pesked sañset, ha kregin. "Lapañ a ra an dour en toulloù-voc'h, evel al loened" eme O.F.

Klask a ra ar paour kaezh C.R.S. distreiñ d'ur stad gouez met n'eo ket bet disoñjet gantañ reiñ keloù d'ar c'helaouennoù ha d'ar skinwel (A2). Kenkoulz vefe bet dezhañ chom en e gouezeri en e gazarn. ■

ED.F., BULL hag HACHETTE a oa o klask un doare d'en em zizober eus o gounidoù arc'hant. Lakaet o deus o grabanoù war un tamm skol kentañ derez, e MAOUR-BREIZH (35) dre hanterouriezh MADELIN. Ar paour-kaezh skol-se a zo eizh klas anezhi diwar zek e koad pe kartoñs pe dost, met a-benn 1990 e vo nevez-flamm : urzhiaer BULL amañ, postoù-tele ahont, levrioù HACHETTE eno... ur milion a zispigno EDF evit ar skol.

Diwanañ a ra aze ur rummad nevez a skolioù prevez : e plas ar c'hatekiz e vo ur gentel bemdeziek diwar-benn an nerzh nukleel. ■

UNICOPA a zo bet sinet gant -ti ur c'hevrad bras gant bro ar Soviedoù : 2000 devezh-arat avaloù-douar da bourchas dezho : an had (210 donenn), an temz, al louzoù, ha stummidigezh al labourerien ivez. Pevar milion a lurioù e penn kentañ, da c'hortoz gwelloc'h.

Labourerien-douar bro GOR-BATCHEV ne ouzont ket plantañ pátatez ken, war-lerc'h degadoù

a sokialouriezh ! Daoust ha ne vo ket ret gwerzhañ douar dezho ivez ? "Ma vefe renet bro ar

SAHARA gant reolennoù ar sokialouriezh, e vankfe traezh ken buan ha tra". Gwiriekaet an istor. ■

Ar B.P.O.A. a zo anv an ti bank nevez, o kendeuziñ ar "Banque Populaire de l'Ouest" hag ar "Banque Populaire d'Armorique". Lidet e vo an eured ez-ofisiel d'ar 26 a viz Mae, met evit ar gwelet, e oa bet pedet e miz Ebrel ar 700 implijad war un dachenn-sportoù e Roazon, n'eo ket hepken da lonkañ ur banne hag un toast met da sevel o logo nevez, evel ar skolidi bep bloaz e-kerz gouel ar yaouankiz.

(LOGO GANT FOTO OF. TUD AR BANK war 2 golonenn vo ret lakaat ar skrid dindan pe a-us d'ar foto)

Seizh kant den gwisket heñvel e stumm logo ar bank, amzer da dennañ luc'hskeudennoù. Arouez arrallekadur an implijidi, korf hag ene d'o embregerezh arc'hant. ■

Pa oa bac'het KAUFMAN, CARTON ha FONTAINE e Beyrouth ne vefe gwelet nemet unan eus o gwagez o virvilhañ er c'helaouennoù hag er skinwel. Ne oa ket dimezet ar re all ? N'o devoa mignon ebet ?

Distroet d'ar gêr eo bet klevet KAUFMAN o kontañ en doa kavet harp en e feiz kristen. E warded ivez a grede e Doue, met ne oa ket ar memes hini. Hag an daou all, marteze o deus mallozhet o Doue ?

Dieubet KAUFMAN, peseurt micher a raio bremañ e wreg ? Ret dezhi mont da glask fred en ANPE ? ■